

Maurriad



#42

BANNOÙ-TRESET
HA C'HOARIOÙ !



• NICOBY • DEPIERROIS • PHIL • PEPITO • MORINIÈRE/TAREK •
FOURNIER • BALAN • LOL • MURELIEN.H • MORVAN • SANGLA • LE DORVEN

Crédit Mutuel de Bretagne
 banque à qui parler



Diskoulmoù
 Yaouankizoù

A-feson eo
 ma bank din-me!

* Solutions jeunes - Ma banque elle est comme ça !
 Caisse Interfédérale de Crédit Mutuel. Société anonyme coopérative de crédit à capital variable et de courtage d'assurances (pour les opérations de courtage d'assurance) - garantie financière et assurance de responsabilité civile professionnelle conformes aux articles L512-6 et L512-7 du Code des assurances, 32 rue Mirabeau - 29450 Le Rellecq Kerhuon - SIREN 775 577 018 RCS Brest - Mars 2006



Dinor Baudelaire
BARZHONIEZH 1869
Tres.: M.DEPERROIS




Na maleirius
e c'hell bezañ an den,



met eürus
an arzour...



Rannet gant ar c'hoant,



Nag ur c'hoant a zo ennon livañ an hini a zo en em ziskouezet din,
ken rouez ha ken buan, a-dreñv d'ar beajoer kaset kuit gant an noz.
Na pell 'zo dija eo aet kuit a-ziwar wel !





Brav eo hag ouzhpenn brav. Souezhus eo. Enni eo puilh an du
ha pep tra awenet ganti a zo don ha teñval-noz.



He daoulagad a zo par da zaou ger e-lec'h ma lugern divosis ar gerin hag
he sell a sklerijenn evel al luc'het: un darzhadenn e-kreiz an deñvalded.
Keñverian a rafen anezhi ouzh un heol du, gant ma c'heller ijinañ un astr
du o skuilhañ gouloù hag eürusted. Met lakaat a ra ac'hanomp da soñjal,
aesc'h, el loar an hini he deus merket anezhi, kazi sur, gant he levezon greñv.
N'eo ket loar gwenn ar c'harantezioù, an hini a denn d'ur plac'h nevez yen,
met al loar euzhus ha mezevellus, a-istribilh e foñs un nozvezh arner hag hejet-
dijet gant ar c'houlmoul a red. N'eo ket ul loar sioul ha dictrouz o tremen
da weladennia kousk an dud glan, met al loar tennet digant an oabl, trec'het
ha ravoltet, bet rediet gant sorjerezed ar Sabbat da zañsal war ar geot skodeget.



En he zalig bihan e kav bod ar youl dibleg hag ar garantez evit he freizh



Ha padal, e traoñ an dremm nec'hus-se, e-lec'h ma kaver fronelloù fiñvus
o sachañ diehan an dianv hag an dibosupl,



E tarz, gant ur gras ne c'heller ket reiñ da gompren, ur c'hoarzh
eus ur genou bras ruz ha gwenn, ha saourus, a ro da huñvreal
e burzhud ur vleunienn espar o tegeriñ war dumenn ur menez-tan.

KOMZOU YAOUANK

gweno le C'HOARIER MELL-DROAD



Gweno le, abaoe pegeit e rit mell-droad ?

Kroget 'm eus pa oan tro-dro 6 vloaz en ur c'hlub bihan e-kichen ma zi. Ha bremañ on 15 vloaz hag e c'hoarian e Sant-Brieg, er Stade Briochin.

E peseurt post e c'hoariit, e peseurt skipailh ?

C'hoari a ran evel rasteller, gant an niverenn 6 gant ar skipailh krennarded 16 vloaz, war al live broadel. C'hoari a ran a-enep da skipailhoù evel, Gwengamp, Roazhon, An Oriant, Bretiny (91), Le Mans, Caen, Couaines (72), Clairefontaine (78), Laval, Blois, Orléans.

Petra eo an taol kaerañ ho peus bet graet war un dachenn ?

An taol kaerañ m'eus graet zo savetein ur pal en ur final eus ur tournamant. Bet m'eus chañs rak digor-bras oa ar pal.

Penaos oc'h en em lakaet da bleustrifñ gant ar sport-se ?

Kroget em eus da 9 vloaz er « Stade Briochin » evit bezañ gant ur mignon din. Kroget 'm eus gant ur prantad gourdoniñ hag ur c'hrogad ar sizhun hepken. Ha bremañ on erruet da 3 frantad gourdoniñ hag ur match ar sizhun.

Petra a lak ac'hanoc'h da reiñ kement-se a amzer d'ar sport-se? Petra a gavit amañ ne gavfoc'h ket e lec'h all, gant ur sport all ?

Ar pezh a lak ac'hanon da reiñ kement-se a amzer d'ar

mell droad eo ar blijadur a gemeran war an dachenn hag ar c'hoant c'hoari gant ma mignoned. Hag ar c'hoant bezañ bemdez gwelloc'h-gwellañ, ar pezh ne gavan ket e sportoù all.

Ur sport war an diskar eo pe kentoc'h war ziorren eo ar vell-droad ?

Ur sport war ziorren eo peogwir ez eus muioc'h-mui a dud dedennet. Ur sport poblek-tre eo hag e vo poblekoc'h c'hoazh goude kip ar bed.

Piv eo ho mestr war dachenn ar vell-droad ?

Pa oan bihan e oa David Beckham, evel kalz a dud all, met bremañ eo ur c'hoarier yaouank anvet Fabregas.

(...) Ur sport poblek-tre eo ar vell-droad hag e vo muioc'h c'hoazh goude kip ar bed.

C'hoari a ra e Arsenal, e Bro Saoz, e memes post ha ma hini.

Ha n'eo ket brein bed ar vell-droad gant an arc'hant ?

Gwir eo e kemer an arc'hant kalz a blas e bed ar vell-droad. Ar memes skipailhoù eo a vez gwelet bepred e penn ar c'hampionadoù. Ar re binvidikañ int dre ma z'eo aesoc'h evito prenañ c'hoarierien a-feson da skouer.

Petra a soñjit ouzh an holl c'hoarierien ne gavont ket labour ?

Ya gwir. Bez' ez eus kalz a c'hoarierien a-vicher dilabour pe c'hoazh tud gant ur gopr bihan-kenañ. Met gant al labour e teuo un dez ma vo tu dezho en em ziskouez hag ober o zoull.

Pehini eo ar skipailh a blij deoc'h ar muiañ ha perak ?

Manchester United rak kavout a ran brav-tre o doare da c'hoari ha plijout a ra din an holl c'hoarierien a vez o c'hoari du-hont...

Perak ar vell-droad kentoc'h eget ar basket ?

C'hoariet 'm eus kalz mell-droad er skol ha n'em eus ket bet digarez da c'hoari

basket rak n'hon devoa ket a banelloù basket er skol.

Petra en deus degaset ar vell-droad deoc'h en ho puhez pemdeziek ?

Ar vell-droad a zo un entan bras evidon rak pa ne c'hoarian ket e sellan ouzh matchoù er skinwel pe e lennan kazetennoù mell-droad...

Ur familh vras eo ar c'hlub e-lec'h ma c'hourdonit ?

Ya, bez' e c'heller lâroust an dra-se peogwir on mignon gant an holl c'hoarierien a zo er c'hlub. N'eus ket un den ha na blij ket din. Bepred on bet plijet gant ma gourdonerien.

Betek pelec'h emac'h e soñj mont gant ar vell-droad ? Bezañ c'hoarier a-vicher ?

An holl dud entanet a blijfe dezho ober eus ar vell-droad o micher. Ya, plijout a rafe din bezañ ur c'hoarier a-vicher met hir-tre eo an hent c'hoazh.

Peseurt ali a rofec'h d'ar re a grog gant ar sport-se ?

Arabat dilezel abalamour d'ur gudenn vihan, ha pouezusoc'h c'hoazh: arabat digalonekaat. Gant an labour e teuo an araokadennoù.




Oad 15 vloaz. Peseurt liv a blij deoc'h ar muian gwir Peseurt bro Breizh Peseurt sport, estregret ar vell-droad Tennis Ar film en deus bet plijet deoc'h ar muian American History An aktour pe an aktourez Samuel L. Jackson Ar miz eus ar bloaz Eost Ar meuz a blij deoc'h debrin Trozennou Ar sonerzh a blij deoc'h selaou Sonerzh Michel Jackson

CHOARIOUSUPERKOULDREISTMEGABEUZ

AR GONT REIZH

Pelec'h e vo ret kas ar biroù, unan dre wenn, evit kaout daou-ugent poent en holl ?



AL LOGOGRIF

1	2	3	4	5	6
4	6	5	2	1	
4	5	2	6		
4	2	6			
4	2				
4					

N'eo ket kalz a dra.

Evit bale.

Goude div.

Domani

Lojeiz

Lizherenn

Leugnit ar gael o lakaat lizherennoù e plas ar sifroù.
(Dalc'hmat ar memes lizherenn evit sifri-mañ-sifri, anat !)

CHARADENN

1. En tu all d'ar revr emañ ar c'hentañ.
2. An eil, n'eo ket un diaoulig.
3. An trede a roio legumaj.
4. Ur ger-mell eo ar pevare.

Sikour : Dre-se e kaver an NORZH gant un nadoz-vor.
PETRA ON ?

OLIVE-VEP




TAVARN * CHAL HA DICHAL *

PA OAS O LAVARET AN DEVEZH ALL...

...E PLUJE KALZ DIT VA MIGNONED...

NE OAN KET O SORJAL ER BOUED, TAMMA EBET.




AR GER KUZH

B	R	E	V	E	D	0
D	A	N	V	E	Z	1
H	E	N	T	A	N	4
K	E	N	T	E	L	2
P	E	N	N	A	D	4
T	A	M	M	O	U	1
T	R	I	K	O	N	2
P	L	A	S	O	U	0
F	L	O	D	A	D	1
						6


E-tal pep ger ez eus ur sifri o reiñ da c'houzout pet lizherenn eus ar ger kuzh a zo en o flas.

AR STEREDENN



Z N K T R E A O N E
En ur implijout lizherennoù ar c'hoari e ranker dizoleiñ ha plasiñ c'hweh'her ger peder lizherenn.

AN HEULIAD



Ret eo liammañ ar rontoù kenetrezo gant euennoù a-benn kaout an heuliad A, B, C, D, A, B, C, D... Arabat kroaziñ al linennoù ha n'eus ket tu liammañ daou ront gant ar memes liv.

UNAN-HA-TREGONT

2	9	15	3	8
6	5	9	1	4
10	7	2	12	5
1	9	8	2	6

Ret eo rannañ etre peder lodenn ar gael-mañ, o kaout ar sammad a UNAN-HA-TREGONT e pep hini. Ne c'heller ket implijout div wech ar memes sifri !

RUNEZ ERVIDIK KLOE MARKOVITCH

Warc'henta a ya gell dige



DIRI AR GERTOU

TRAMOR

1. _____ Den du.

2. _____ Sifr ne c'heller ket rannañ.

3. _____ Komprene.

4. _____ Ti e danvez.

5. _____ Sport.

6. _____ N'eo ket ur benn-lavarenn

7. _____ skrid goude emvod.

8. _____ C'hoari gant sifrou.

9. _____ Boued ar Maghreb

10. _____ Votet gant an deputeed

11. _____ Hegaset.

12. _____ Entan.

13. _____ Spesou.

14. _____ Sabatañ.

INIZI

Disken eus «tramor» da «inizi» oc'h implijout dibenn an anv a oa a-raok.

SUDOKU

6	2	7	3	1	
7	8	5			
		6	2	5	8
			4	6	
1	9	7	8	3	2
	4	2			
2	4	8	6	7	
			5	7	4
9	7	4		1	6

X X X X X

7		4	1		
6			7		4
	3	6	8	2	
	1	2		5	
		3	5	8	1
		9		4	1
	4	8	6	7	
3		1			2
			7	9	

X X X X X

AR GALL GERTOU-MESKET DIAS BOMIHADL

AR SINEMA-1

SENGBEOUEEDYRLARFGIL
MKOONRIULDIAAOULAIRN
HEORTNOLNESRVZAERABL
OAIIOISECAZNEOMAUNNEV
OCWLRBUEANEDDORNECTP
OOLKEBBHLOUVOAEUCOAR
BEANSCHABROLMLSBALRC
FLUAENROCCKALNOTPAEL
AHNOSSEBAUEAACUSRANO
NRALLEGRETFDNHAAUHU
OBANTENCBDOEOHAAKDCZ
NEDLAEOENRETLRGMPEAO
OCECTPIEDORLHAXALLFT
RKMWPNTTECULHLINDNAIW
EYOETAABRNLAURNUAPN
MRLXAAALTMANTIICIOGRE
AANYTROKUCEACOVDIYZB
CEADRADOGAOSHSTRUNHA
NCDASSINBERRITGANCEE
NAMGREBRKANTFILJMAVO

- ALDRICH
- ALLEGRET
- ALLEN
- ALMODOVAR
- ALTMAN
- ASTRUC
- AUTANT-LARA
- BECKER
- BEINEX
- BERGMAN
- BERRI
- BESSON
- BRANAGH
- BROCA
- BROOKS
- BUNUEL
- BURTON
- CAMERON
- CAPRA
- CARNE
- CAYATTE
- CHABROL
- CHAPLIN
- CLOUZOT
- COPPOLA
- CORNEAU
- CUKOR
- DASSIN
- DELANNOY
- DELLUC
- DEMY
- DE PALMA
- DERAY
- DISNEY
- DOILLON
- ENRICO
- ETAIX
- FECHNER
- FELLINI
- FORD
- GANCE
- GIANCOLA
- GODARD
- HAWKS
- HUNEBELLE
- HUSTON
- JARDIN

AR FRAZENN GUZH

Gant al lizherennou a chom a tere'hel gant o urzh e c'hellez sevel ur frazenn.

RESPONTOU AR CHOARIOU PA SEDREI STANNIVERENNTRE MENET

p. 12: AL LOGOGRAF : 1(R), 2(A), 3(M), 4(Z), 5(E), 6(L)
CHARADENN: urzh-ya-taer-aes (urzhiaataerezh)
p. 13: AR GER KUZH : Renabl (6)

p. 14: GWRIAT : B = 1600m², C = 1800m²

D = 1600m², E = 1500m², F = 900m², G = 800m², H = 600m²

p. 15: N'eo ket gant taboulinoù e vo tapet kezek spontik.

ARGOLENDRUCH-MIK

Ganet eo daou baotr ar memez bloavezh, d'an hevelep devezh. Bez o deus ivez an hevelep mamm. Koulskoude n'int ket gevelled. Penaos e c'hell bezañ posupl ?



BEVAJ DA EUSKAL HERRIA

Labour kaset da benn gant skolajidi DIWAN ar Releg-Ke-rhuon hag a c'hellennerz war ar c'hastilhaneg

Abaoc'h kalz a vloavezhioù dija, e vez graet un eskemm etre Breizh ha Bro-Euskadi. Kroget 'zo bet an eskemmoù etre skolaj Diwan Ar Releg hag ul lise eus Donostia, al lise Barandiaran. Goude zo bet savet un eskemm gant Arrasate. Skolaj Diwan Kemper a gendalc'h an eskemm gant Arizmendi Ikastola. Abaoe daou vloaz ez a skolajidi trede klas Ar Releg da dTolosa, da 25 km eus Donostia. Tolosa a zo un gêr plius ha brav. 18000 den a zo o vevan enni. Menezioù brav 'zo ivez tro-dro da dTolosa. An eskemm 'zo bet graet gant Laskorain Ikastola. Mont a reomp du-se evit komz kastilhaneg hag ivez a zeu e Breizh evit komz galleg. Dizoidet e vez ivez an Euskera, yezh ar vro, gant ar Vreizhiz hag ar brezhoneg gant an Euskariz.

Perak un eskemm gant Tolosa? Ret eo lavaret, da gentañ penn, eo an Euskariz tost-tre ouzh ar Vreizhiz. Ar memes spered a zo ganto. Ur bobl blijus eo, degemerus-tre, tomm-tre ouzh o sevenadur. Pal an eskemm a zo diskouez



d'hor skolajidi eo posupl bevañ eno, penn da benn, en eur gomz euskera. E Tolosa e vez kavet 72 % eus ar boblañs o komz euskera bemdez. Ar veaj-se a lak ar Vreizhiz da brederiañ war implij ar brezhoneg. Amañ eo disheñvel penn-da-benn: er-maez eus ar skolaj ne vez ket implijet kalz ar brezhoneg ganto. Met spi 'm eus e roio an eskemm-se ar c'hoant dezho da implij hor yezh muioc'h-mui evit reiñ lañs dezhi ha marteze, un dervezh bennak, e vo posupl deomp lavaret ivez ez eus un dregantad uhel eus hor skolajidi a ve, a gar, a gan, a zañs ...e brezhoneg ivez. An eskemm-

se a zo pouezus ivez evit komz gant skolajidi Bro-Euskadi dre vail, dre bellgomz, dre sms. Ar c'hastilhaneg a zeu aesoc'h ivez ganto goude ur sizhunvezh implij. Ret eo lavaret e vez degemeret ar Vreizhiz, unan dre familh nemetken, setu m'eo ret dezho en em sachañ evit kompren, komz hag eskemm gant ar familhoù. Tud 'zo a gendalc'h da eskemm bloavezhioù goude ar veaj. Setu n'eo ket fall!!!! Evidon eo un trec'h da vat!


Setu skolajidi Ar Releg a gonto deoc'h un nebeud dervezhioù tremenet e Bro Euskadi.

Beatris

Ha tad-kozh da gontañ da Irial penaos eo en em gavet an den kentañ war al loar...



MA N'EO KET TRIST... N'EO KET UN DEZ MAT EVIDON!!



DONT A RIN A-BENN, KOUSTO PE GOUSTO!! ALE, BERJELENNIG ME!



KEN TOST E OAN EUS AR PAL HA SETU... CHWITET E OA PEP TRA ABALAMOUR D'UR CLAVAD METEORIT I KET A CHARS!!



ALE, UN TAMM STRIV C'HOAZH, BERJELENNIG-ME, UN TAMMIG...



MA FENN... O. EUH...



ANKENET E OA AOTROU LOAR, NE FELLE KET DEZHAÑ OBER POAN D'AN DEN A STURIE AR FUZEENN...



da rozañ komzalek...

Na lipous an tomatéz bihan !



Copyright Saveol pour l'usage de la Communauté européenne



Un teuzar an hini eo... **saveol**

21, ST. AR PONT - 29470 PLOUGASTELL - PGZ. 02 98 40 30 30 - PLR. 02 98 40 29 74 - WWW.SAVEOL.COM



ALLO SOS EUZHVIL !
UR GEFRIIDI HON EUS
EVIDOC'H...UR C'HOARIELL
RAMZEL A ZO O TISTRUJ
KER. UR FARSADENN NUL
A-BERZH UR LAMPON
FALL EO, SUR.



MAT EO AR GORRIGED,
OBER A REOMP WAR-DRO EN
TAOL-MAR, KUIFEZ DEOC'H
D'HOR SIKOUR BEHN
UR WECH ALL !



E, PAOTRED !
UR MENNOZH 'M EUS
MET C'HOARZHIN A
RAFEC'H OUZHIN.

O FARSAL
EMAOUT !



KERZH
WAR-RAOK,
BITIG !



N'HO PEUS KET MEZH
DA C'HOARI GANT UN
ARZHIG FEUR !
A C'HA C'HA !!



N'EO KET KEN DNOT HAG HO
C'HOARIOU VIDEO ! HAG A-DRUGAREZ
DEZHAO OMP DEUET A-BENN
EUS HOR C'HEFRIDI.



TADIG !
TADIG !

C'HA !
C'HA !
C'HA !



HA KLASK CHOM
REIZH AN TAOL-
MAR !!



MAT EO, N'ON
KET DAOUZEK
VLOAZ KEN.



A-WECHOÙ
EN EM C'HOU-
LENNAN.

MAT AR JEU
GANEOC'H TIN-
TIN ANNA ?

O BENNOZH-
DOUE DEOC'H,
MA BISOUSIGOU,
DEUIT-TRE 'TA...



HA NEUZE,
PETRA HO PEUS
DA GONTAN
DEOMP ?



O, PAS KALZ
A DRA...



NEMET DIWAR-BENN DA
GENINTERVEZ, MERCH VIHAN
MARI-ANNA, A ZO TROET
DA SOT HA PLAPLAPLI...
PLAPLAP



... HA PADAL, MAB HENRI, ANAVE-
ZOUT A RIT ANEZHAN, HENNEZH
A ZO UNAN STRIUS
HA PLAPLAPLA...



MET N'EO KET POSUPL !!
N'OUT KET GOUEST
DA CHOM FUR OUIZHPENN
PEMP MUNITENN !!!



LAOSK 'TA, MA MERCHIG.
N'EO KET STRIKT...
BEZ' E C'HELL DA
VIGNON...



KARGAN E GOF KEMENT
HAG EN DELS
C'HOANT...



DA MA OAD, GOUZOUT
A REZ...



N'EM EUS GALLET NEMET
SUNAN AR CHOKOLAD A OA
TRO-DRO DEZHO.



... 480... 481... ?!
UN... UN TI ? !



UN IZO KAMMED A CHOM DIMP DA OBER...
EN TI-SE EMAN AN TEIZOR, A DRA SUR.



GAMN EZ EUS PEADRA DA LAEREZH
FIZIARS AN DUD ZO
O CHOM ENNAR.

DEOMP DE' !



FARZ GWINNIZH, EMANT O VONT-
TRE E TI VBIZU...



RA VO PREST
AN HOLL VILZIGED !



KARNABLEM MEUR !
AET EO AN TRIKON JABADAO
E TI VBIZU !

FARZ KRABAN !



BIZU PAOUR, N'EMAN KET
WAR-C'HED HA ME C'HOULENN
KET SIKOUR DIGANIMP !



HA N'EUS TU EBET DIMP
DA GAS KELOU DEZHAN !



D'ar c'houtz-se...
... NEUZE, DA GLASK TRUFEANNOU
AN HINI E RIT AN HOLL DOULLOU-SE ?

AN, YA... SE EO.
DRES !



ENBOURIEN
D'AM GOUENN
ADARRE, KAZ
AM EUS OUTO !



HA KALZ TRUFEANNOU
A GAVIT ?
BREMAM
DEOMP !

MA... NEBELT
A-WALC'H,
E GWIRIONEZ !



MURKZ, KAE D'AN NEC'H DA LAVARET
DA SCHOGPUL EZ EUS TUD
EN TI.



A !
N'OC'H KET
HOC'H-UNAN ?



TOMIG EO HENNEZH, KEH KLARENN EO
M'EO BET RET DIMP E VINWASKAN.

MMHHMMH !



HA RIT BET BULO, N'EO METRA, UN
TACL TORCH HA MAT PELL ZO.

MAON O TONT, BIZU.

PEZH GENAOLEG !
BEULKE !



SETU !

A... A...
AR GWEREANNOU !



HEP ! KAS A RIT
MA GWEREANN
GANEOC'H.

o ! HO TIGAREZ, DALIT,
SETU-HI.



HA MA HINI EO
PE N'EO KET
MA HINI ?

HO
GWEREANN
BIZU.

TRUGAREZ, SAVOMP TA UR YEC'HED
EVIT MA FONNO AN TRUFEANNOU.



YEC'HED DEOC'H, AOTROU...
AR...

PEAN-DU, MICHOM-
ME, PEAN-DU.



BREMAM VAT EO RANKOMP LAVARET
KENAVO DEOC'H.

bizu an trio jabadao

J.C. FOURNIER

EMAOMP o vont da GAS DA JAKETA, AL LEMHEREZ-PLAMEDEMOU, UR VOULLEIN-STRUK NEVEZ...



- HEc'h NINI OA ERRU UZ KEH NE LEMNE NEMET AN TREMEDE ENNI...



KLEVIT, HA NE VE KET GWELLOc'h TENNAI MANWASK HO MICH...



KOU... KOU... KOU... KOU...



KOUSKET, PENN BRENNIG, KOUSKET Eo.



CHOMIT AMAñ KEH NA ZIHUNO. NI A RANK MONT. GRIT EVEL PA VEFEc'h ER GER.



Prest gvide...



Bo / MARTEZE.



PENN-DU, PAOUEZ A C'HELLEZ GANT DA C'HOARI, AET INT.



GAST ! EVET EN DEUS AL LOUZOU-KOUSKET EN DOA LAKAET DA VIZU !



MNNWBLVLB !



NEPTAI, NE C'HELLOMP OBER METRA : EN Eo AR MESTR. DILUNIRAY BUAN, EMICHAIS.



DA C'HORTOZ E TENNAI DA VINWASK, NE C'HEUS KET EZHOMM AMEZHAI KEH

DA VEZAN KENALC'HEC...

YOURC'HL ER FELTEZI

Aurelien H



Ma ! Amañ, sur e kavin ar pezh a glaskan.



Gaññ 'zo oñs. Eñt ober peñra eo ?



Eñt dont da vezañ brasañ sorser ar bed ha bezañ MESTR WAR AR BED !!!



Met hep bazi... m'eo ket ken aes.



Gep endoc'h : AR SUPER STICK !



Met DIWALLIT mat, kreñ-tre eo !



WZZZ

Din ar GALLOD !



???

PLÖP PLOP

Mat ! Dont-tre paotred ! MECHOU a vo fe-noz !

LAMM-STIRENN gant A.MORVAN



embannet gant / Editions :
KEIT VIMP BEV
 22, grand rue
 29520 LAZ
 Pgz : 02.98.26.87.12
 Plr : 02.98.26.80.35
 keit-vimp-bev@wanadoo.fr
 Moullet gant / Imprimerie :
OUESTELIO
 505 st. Jurien
 de la Graviere
 BP 30708 BREST
 cedex 02
 Rener ar gazetenn /
 Directeur de la publication:
Yann-Fanch JACQ
 Kenurzhiañ / Maketennañ
 Tresañ ar c'hoarioù :
Owen POHO
 owen.kvb@wanadoo.fr
 Tresadenn ar golo :
M. DEPIERROIS
 Skozzellerien :
Paskal ar Marc, heg
 Koumanantin :
 58 euro ar bloaz
 4,2 euro ar miz
 (dre dreuzvankañ)

Niv. CPPAP : 1010 G 840 75

Istorioù farsus
YANN BIJER

Mesk-ha-mesk

Ur wech e oa aet un den, hag a oa un aotrou deus outañ, d' ober ur verdeadenn, asambles gant e wreg, e bourzh ur vatimant bras ha cheuc'h. War-dro daou vil den a oa war ar vatimant-se. Aet e oant da bell, betek an Inizi Karaib, setu ma padas ar veaj war-vor ur miz penn-da-benn. Anaoudegezh en doa graet an aotrou gant un den all. Bemdez e vezent asambles o c'hoari ar c'hartoù e «klub» ar wazed. Un devezh, ma oa ar vatimant war hent an distro, hag an daou zen o pourmen war ar pont uhelañ, e lavaras an aotrou d' an den all. « Ha gwelout a rit, keneil ker, an div vaouez a zo kichen-ha-kichen war bord ar poull-neuiñ, e penn-araok ar vatimant, unan gwisket e ruz hag eben e glas ? »

« O gwelout a ran mat-tre, ya. »
 « A beñ, a gendalc'has an aotrou, an hini ruz eo ma gwreg hag an hini c'hlas a zo deuet da vezañ ma mestrez kerkent ha ma oant ambarket war ar vatimant-mañ, teir sizhun' zo dija. »
 Hag an den all ha diskordañ da c'hoarzhin.
 « Petra ho laka da zirollañ da c'hoarzhin evel-se? a c'houlenn an aotrou, feuket an tamm anezhañ. Hag e respont egile. »
 « N' eo ket, c'hwi' lâ, gwall-luziet eo planedenn mab-den a-wechoù, hañ! An hini ruz ho kwreg, an hini c'hlas ho mestrez, war a lavarit! Piv en dije kredet? Evidon-me eo ar c'hontrol-krenn. »

DARIUS Gilles SANGLA



